

KOADOUT

Tòn : *Breiz-Izel.*

Koadout a zo eur barouzik
A c'hiz koz, c'hoaz, mat ha sioulik,
Eun nez kuzet war ar maezio,
Touez ar glazur hag ar bleunio.

Enni kaver roz ha traouien,
Enni klever richanerien,
Estig-bailh, drask, moualc'h, pinsin,
A gan seder noz ha mintin.

Du-man, du-hont, gwe boudennek,
'Us d'hencho don ha tosennek,
Brouskoajou bras ha divabo,
Hag en pep park gwe avalo.

Epad miz mae gwelet ane,
N'an afet ket, sur, ac'hane,
Hep lavaret : O bro Koadout,
Nan e ket koat, mes bleun ec'h out !

Hag ar bleun-ze a strink c'houez vad,
Ken, o goude, 'kaver divad
Pleustri lec'hio 'lec'h ne gaver
'Met bleun gwenvet en o c'henver.

Plijout ra d'ec'h ar mammenno ?
Ar gwazion koant en traouienno ?
Deut da Goadout gant botou koat,
'Vit didui ho taoulagad.

'Kreiz ar prajo, drek ar c'hleunio,
A luf warne, a-vern, bleunio,

C'houi a glevo hihoud an dour,
Da heul kanio an evn gedour.

Yost ha skuiz oc'h gant tabut k er,
Gant ar poultr 'nij 'touez tie kaer ?
Deut da dihan war hon maezio,
Ha krapet war hon meneio.

Hag ac'hane, t let eur zell,
War eur c'horn brao a Vreiz-Izel ;
Gwengamp a vo dindan ho treid,
Ti sant Iltud na vo ket keit.

Ha goude 'po gwelet ar vro,
Deut c'hoaz, ar k mont war ho tro,
Betek iliz vihan Koadout.
Ho peaj vo ket didalvout.

An iliz-ze pell 'zo savet,
A diaze 'n eur zaon gwasket,
Enni, en peuc'h, gret ho peden,
Goude, laret d'in ho kreden.

Hag eveldon c'houi a laro :
Dies ve k t dudi soc'h bro !
En gwirione, tud sant Iltud,
Deus ket da glemm ; brao eo o c'hlud.

Telen ar barz, 'n eus c'hoanteet
Kanan Koadout, oa distignet ;
An estig-bailh an eus klevet,
Hadstignan 'nei d'ean 'n eus gret.

X...